

Siviled ha soudarded er Brezel-bed Kentañ

Koupabl on:

I. Adlâr pennadoù bras ar brezel:



II. Deskriviñ ha displegiñ ar feulster a-vil-vern:

• Emgann Verdun

E **Reter Frañs** emañ ar gêr Verdun. Tremen a ra an emgann etre an 21 a viz C'hwevrer 1916 hag an 19 a viz An Azvent 1916 hag e pad 300 deiz. Kas a ra an Alamaned an argad a-benn toullañ an talbenn.

Àr an talbenn emañ kuzhet ar soudarded e-barzh fozioù-difenn hir en douar anvet « **trañcheoù** ». Aozet eo an trañcheoù tro-dro teir linenn liammet etreze get **gouinelloù**(bouzelloù). Emañ tost-tre ar linennoù enebour. Etre an daou eh eus un « **no man's land** » hag orjalennoù. Chom a ra ar **Poilu** deiziadoù ha deiziadoù, memes sizhuniadoù é c'hortoz àr an talbenn. **Mantrus** eo ar stuzoù-beviñ, é veviñ **er fank, get ar razhed, laou er yenijenn ha glebder get ur yec'honiezh mezhus**. N'eus lec'h prevez ebet, korfoù-marv a chom. « *L'enfer c'est la boue* ».

Feulstr-tre eo an emgannoù. Akipet eo ar soudarded get fuzuilhoù, mitrailhetennoù, greunadoù hag ivez armoù gwenn evit an emgann korf-ha-korf(goustilh, bazh-dotu, fuzuilh-kontell).

Piloueriñ a ra an artilheri pounner tachenn ar brezel: **4 tonenn a obuzioù dre m²** a zo bet bannet e Verdun.

Armoù zo a zo evit bout **lazhus a-vil-vern ha kriz:lañs flammoù; gaz Yperite**.Choukadet eo ar soudarded: ar « **genoù torret** » e vez graet ag ar soudarded gloazet

Trec'h eo bet ar C'hallaoued : 400 000 soudard marv, 450 000 den gloazet pe choukadet. **Arouez ar feulster a-vil-vern eo Verdun.**

Deiziadoù pouezus:

Ar Brezel-bed Kentañ: 1914-1918

Emgann Verdun: 1916

Arsav-brezel : 11 a viz Du 1918

Dispac'h e Rusia: 1917

Tud talvoudus:



Fulup Petain

Gourc'hemenn a ra ar jeneral gall Fulup Petain ar bagadoù gall e Verdun e 1916. Brudet-tre eo e fin ar brezel.



Lenin

Dispac'hour rus, Vladimir Illitch Oulianov, lesanvet Lenin(1870-1924) a sav an dispac'h e miz Here 1917. Ren a ra-eñ e Rusia betek e varv e 1924.

Geriaoueg:


- ✓ Brezel hollek,fozioù-difenn(trañcheoù),bolchevik, arsav-brezel
- ✓ Talbenn,renad komunist
- ✓ Feur-emglev,mutinerezh
- ✓ Poilus,kontrollerezh(sañsur)
- ✓ Propaganda,soviet
- ✓ Spartakisted,choukiñ pennoù

• Gouennlazh armenian


E-pad ar Brezel-bed Kentañ e voe taget ivez ar siviled get ar feuslter a-vil-vern. E **1915** e tenn splot ar gouarnamant otoman ag ar c'henarroud brezel evit tagiñ an **Armenianed**. Tamallet eo dezhe da vout **tretourien ha bout e tu o enebourien rusian**. **Ur vinorelezh kristen** eo an Armenianed. Beviñ a rant e biz an Impalaeriezh otoman (Turkia hiziv-an-deiz) hag er C'haokaz rusian. A-raok ar brezel e oant 2 vilion. Meur a zoare ez eus er feulster a-vil-vern enep d'ar bobl armenian: **niverennet ha fichennet eo ar bobl armenian** get ar Stad otoman. Goude eo bet **arlezekaet ar boblañs armenian er gevredigezh é skarzhiñ anezhe ha tenniñ dezhe o madoù**. Oc'hpenn- tra e voe aozet get ar Stad **skrapadegoù (raflou) er c'hêrioù**, àr ar maez a-benn o **deportiñ er c'hampoù-kreizenniñ er zonennoù dezerzhel**. **Lazhadegoù, gwallidigezh, bac'hdigezh, muntroù, preizherezh.....** E-pad an deportadurioù a-stroll e rank an Armenianed kerzhet edan an heol, hep dour na boued.

Hervez an istorourien, an ouennlazh armenian he deus kaset d'ar marv etre 600 000 ha 1,5 millon a dud. **Kentañ gouennlazh an XXvet kantved eo.**

III. Deskriviñ kartenn Europa goude ar brezel



Gouiet e kas an Dispac'h rus dispac'hoù en Europa (**Spartakisted en Alamagn get Rosa Luxembourg**).



Poilu: lesanv roet d'ar soudarded e-pad ar Brezel-Bed Kentañ.

Gouennlazh: distrujiñ ur bobl. Lazhadeg a-vern ag ur boblad a-bezh evit he c'has da get.

Deportadur: dilec'hiñ rekis ur boblañs.

Propaganda: taol bruderezh a-benn klask levezoniñ meno an dud dre veuliñ ar pezh a zle bout degemeret ha kavout abeg er pezh a zle bout distaolet.

Dispac'h Bolchevik: Dispac'h renet get Lenin e Rusia hag a savas ur renad komunist (komunour).

Soviet: poellgor pe bodadoù a stroll kouerien, micherourien ha soudarded

Bolchevik: a dalv komunist

Ur brezel hollek:

un ekonomiezh troet àr-zu ar brezel (brezel industriel: produiñ pourvezioù-brezel (obuzioù, tankoù...))

Dispignoù ar Stadoù divent: tailhoù é krapaat, amprestoù get ar poblañsoù, get SUA > krouiñ moneiz > c'hwez moneiz (prizioù é krapaat)).

pep den a striv evit ar brezel (maouezed, tud kozh..),

Mobiliziñ ar speredoù: poblañs evezhiet, kontrollerezh, propaganda.

Choukiñ pennadoù: troienn ijinet get soudarded ar Brezel pevarzek evit ober goap doc'h c'helachoù droch skignet get tud an adreñ Poanioù ar poblañsoù: diouer a vadoù-beveziñ èl ar glaou, tikedoù-boued, rekizadurioù..